

Konsolationou eunn Den krouget

Sao, pign er skeul eta, kos denik,
 Kos truillennik,
 Kos netraik !

N'am euz aoun ebet rak ann Ankou,
 Rag archerien,
 Rag bourrevien ;

N'am euz aoun ebet rak ann Ankou,
 Na rag koulm ar c'hroug-lasou.

Eur skour eo a vezo va bezik,
 Va beredik,
 Va lochennik ;

Begik ar vran eo am dispenno,
 Prenv ann archet
 N'am drebo ket ;

Begik ar vran eo am dispenno,
 Keit ha me zistribillo.

Var va fenn eur volz steredennuz,
 Kel lugernuz,
 Ker peoc'huz ;

Dindan e savo glasderennou,
 Heol a baro,

Gliz a gouezo ;

Dindan e savo glasderennou,
 Ha bleûn etouez ann deliou.

Ha pa luskellot d'in va c'havel,

Avel izel,

Avel huel ;

Me a vranskello va relegou,

Duma, duze,

A bep koste,

Me a vranskello va relegou,

Dizamm diouz mein ar beziou.

(M^r Quérel, curé
 de Châteaulin.)
 Traduit
 en
 Latin